

DIVINATEZOÙ SIZHUN AR MATEMATIKOÙ
Respontoù ar lun 17 a viz Meurzh 2014 : Istor

Live 1 : Ar ganedigezh

Karim en deus 7 vloaz.
E vamm he deus 32 vloaz

Pet vloaz oa hi pa oa ganet Karim ? 25 vloaz oa hi pa oa ganet Karim (32 - 7 = 25).

Live 2 : An div c'hoar

Gevelled eo Emma et Léa.
A-benn 25 vloaz, pa vo sammet oad an div c'hoar e vo kavet 100 vloaz.


Pet vloaz int ar bloaz-mañ ? 25 + 25 + 25 + 25 = 100 25 vloaz int ar bloaz-mañ.

Live 3 : Tro ar bed Magellan

Ret eo lenn mat ar pezh a zo skrivet : marv eo Magellan e 1521, neuze, **n'eo ket daet Magellan en-dro da Spagn !!**

Penaos emañ marv Magellan ?

En ur zont en-dro dre ar Filipin en doa dilestret Magellan war un enezenn vihan. Aze e oa bet gouliet gant ur bir ampoezonet. Marv oa a-ziwar an dra-se d'ar 27 a viz Ebrel 1521.



Live 4 : Ar Romaned

Ar c'hant-dener a zo nebeutoc'h evit kant soudard ar lejion gantañ. Urzhiañ a ra d'e soudarded :
« **En em rañjit dre 4 !** ». N'en deus ket nemet 3 soudard er renkennad diwezhañ.
« **En em rañjit dre 5 !** », N'en deus ket nemet 3 soudard er renkennad diwezhañ.
« **En em rañjit dre 7 !** ». Aze emañ klok tout ar renkennadoù.

Pet soudard a zo gant ar c'hant-dener ?

Bout'zo 63 soudard.

63 = (4 x 15) + 3

63 = (5 x 12) + 3


63 = 9 x 7

63 < 100

DIVINATEZOÙ SIZHUN AR MATEMATIKOÙ

Respontoù ar **Meurzh 18 a viz Meurzh 2014** : **Skiantoù**


Live 1 : Kenveriañ



Peseurt segmant eo an hini hirañ ?

Hani ! An daou segmant o deus ar memes hed.

Live 2 : Padelezh buhez



loen	kazh	buzhugenn	jao	kelionenn	gwenanenn
padelezh	18	24	30	28	4
buhez	vloaz	miz	vloaz	deiz	vloaz

Rañj ar loened hag an hini a veva ar nebeutañ betek an hini a veva ar muiañ :

kelionenn , buzhugenn, gwenanenn, kazh, jao



Live 3 : Ar gonifled

E penn kentañ miz Genver, en doa Pier ur c'houblad konifled. A-ziwar pep koublad konifled, eh eus ur c'houblad nevez bep miz. Pad eo 2 viz, e c'hell pep c'houblad kaout re vihan.

Pet koublad konifled en do Pier e fin Mezheven ?

E Mezheven e vo 8 koublad konifled :

Genver 1, C'hwevrer 1, Meurzh 2, Ebrel 3, Mae 5, Mezheven 8, Gourenheñv 13, Eost 21...

An heuliadenn niveroù zo : **1, 1, 2, 3, 5, 8, 13, 21, 34, 55, 89, 144.**

Pep niver zo sammad an daou niver a zo a-raok. E fin ar bloavezh e vehe 144 koublad konifled !



Live 4 : Lammoù e galon

Pilat a ra da galon 70 gwezh pep munutenn. **Pet gwezh e pila bep bloaz ?**

$70 \times 60 \times 24 \times 365 = 36\,792\,000$

En un bloavezh, e pila da galon 36 792 000 gwezh dre vras.


Rontaet an disoc'h d'ar milion tostañ → 37 000 000

Seul taol ma pila da galon e kas 0,07 litrad gwad e da gorf.

Pet litrad gwad e vez kaset bep bloaz ?

$37\,000\,000 \times 0,07 = 2\,590\,000$

2 590 000 litrad gwad a vez kaset bep bloaz en da gorf !



DIVINATEZOÙ SIZHUN AR MATEMATIKOÙ

Respontoù ar yaou 20 a viz Meurzh 2014 : *Geografiezh*

Live 1 : Ar zoo

Bout 'zo 6 hent posubl :

olifant → kañval → bleiz




olifant → kañval → marmouz → bleiz

olifant → kañval → marmouz → arzh → bleiz

olifant → marmouz → kañval → bleiz

olifant → arzh → marmouz → kañval → bleiz

olifant → kañval → marmouz → arzh → tigr → bleiz



Live 2 : Ar banniel amerikan

Krignet eo bet ar banniel gant ur logodenn.




Mankañ a ra 5 steredenn



Live 3 : Poblañs Gwened

Emdroadur poblañs Gwened



→ e 1975 : **40 359 annez**

Degemeret eo tout ar respontoù etre 40 000 ha 41 000 annez.

→ e 2008 : **52 515 annez**


Degemeret eo tout ar respontoù etre 51 500 ha 53 500 annez.

Live 4 : Frañs

Setu ur gartenn chematek a Frañs.


Skeul : kostez ur garrezenn a dalv evit 100 km.

Jed gorread Frañs tostaet.



552 000 km² eo gorread Frañs.


Degemeret e vez tout a respontoù etre 500 000 et 600 000 km².




DIVINATEZOÙ SIZHUN ar MATEMATIKOÙ

Respontoù ar **Gwener 21 a viz Meurzh : Arzoù**

Live 1 : Marellig 1



Live 2 : Marellig 2



Live 3 : Karrez (majik) Dürer

E-barzh karrez majik Dürer, sammad an niveroù e pep linenn, pep kolonenn ha pep diagonalenn zo par da 34.


Mes doc'hpenn evit majik !! E pep karrez, sammad an niveroù livet zo par da 34 ivez !!

16	3	2	13	16	3	2	13	16	3	2	13	16	3	2	13	16	3	2	13
5	10	11	8	5	10	11	8	5	10	11	8	5	10	11	8	5	10	11	8
9	6	7	12	9	6	7	12	9	6	7	12	9	6	7	12	9	6	7	12
4	15	14	1	4	15	14	1	4	15	14	1	4	15	14	1	4	15	14	1

16	3	2	13	16	3	2	13	16	3	2	13	16	3	2	13
5	10	11	8	5	10	11	8	5	10	11	8	5	10	11	8
9	6	7	12	9	6	7	12	9	6	7	12	9	6	7	12
4	15	14	1	4	15	14	1	4	15	14	1	4	15	14	1

Dürer en deus krouet ar c'harrez-mañ e 1514. **D** evit Dürer a zo 4^{vet} letrenn an alfabet, ha **A** evit Albrecht a zo letrenn gentañ an alfabet.

Live 4 : Ar wezenn



A-ziwar pep karrez hon eus 2 garrez. Neuze :
 $1 + 2 + 4 + 8 + 16 + 32 = 63$

63 c'harrez zo bet implijet evit sevel ar wezenn-mañ.

Degemeret e vo ne vern peseurt metodenn estroc'h evit kontañ unan ha unan. D'ar skouer, implij un ahel simetrek evit dispartiañ ar wezenn e 2 lodenn, doublañ an niver kavet d'un tu, hep ankouazhat ar c'harrez rouz.